

+

## Solemnite Pask

« Gwelet en deus ha kredet en deus. »

Breudeur ha c'hoarezed ker,

(Anouck gaer, ha c'hwi, izili he familh,)

Gouel an Adsavidigezh Jezuz a vez lidet ganeomp hiziv hag e-pad an eizh devezh a zeu a gas ac'hanomp da soñjal da gentañ war an darvoud-se e-unan. Petra eo an Adsavidigezh? Hervez an etimologiezh e talvez bezañ savet en-dro. Hag un distro d'ar vuhez a-raok eo an Adsavidigezh? N'eo ket! Rak Jezuz Adsavet en devo perzhioù all eget ar re a oa gentañ pa veve en hon denezh simpl. Hag un darvoud korfel eo? Ya, evit ul lodenn. Hag un darvoud speredel eo? Ya ivez, evit ul lodenn all. Hag un darvoud istorel eo? Ya, er ster ma'z eo bet c'hoarvezet en istor hag en deus lezet roudoù en istor. An testennoù a glevomp e-pad an amzer pask a ziskouez deomp an hent da vont betek an Adsavidigezh, hag an hent-se eo ar feiz. Ne c'haller ket prouiñ an Adsavidigezh. N'eo ket ur wirionez skiantel met ur wirionez a feiz, da zegemer er feiz, hag a ro startijenn d'hor feiz.

Hiziv beure, breudeur ha c'hoarezed, me a fell din sellet ouzh an darvoud a Adsavidigezh ganeoc'h evel un ober a garantez hag un ober a c'haller tizhout dre ar garantez. An Adsavidigezh a zo un ober a garantez eus Doue evidomp, rak ar garantez-se, ken kreñv, ken galloudek ha ken peurvat, ne c'hell ket chom balc'het en ur bez, ha trec'hiñ a ra war an droug hag ar marv. Adsavidigezh Jezuz zo neuze diskouezadeg ar garantez hollc'halloudek a Zoue a laka an droug hag an droug gwashañ – ar marv – dindan e c'hrabanoù. Ar galloud-se a garantez a vez roet deomp dre sakramant ar vadeziant, a zeu eus Adsavidigezh Jezuz hec'h-unan. Setu perak eo an amzer pask an amzer gwellañ evit badeziñ: amzer ar vuhez nevez roet gant Jezuz.

(Laouen omp hiziv, pa lidomp Adsavidigezh Jezuz, da zegemer er vuhez-se ar plac'hig Anouk, a resev en he donañ ar galloud-se a garantez a Zoue en deus trec'het dija ar marv ha he c'haso da vezañ trec'h war ar marv.)

Ma'z eo gwir eo Adsavidigezh Jezuz un ober a garantez eus Doue evit Jezuz hag evidomp, ez eo ivez un dra a c'haller gounit dre ar garantez. Ha setu amañ eo testeni sant Yann an hini gwellañ. Sant Yann a erru da gentañ tal ar bez. Ya, yaouankoc'h eo eget Per, ha aes eo kompren ez oa gouest da redek buanoc'h. Met un dalvoudegezh arouezel zo ivez. An Avel a lavar deomp e komprenn Sant-Yann da gentañ mister pask Jezuz. Erruet da gentañ tal ar bez, e lez Per da vont e-barzh da gentañ. Per a wel merkoù ar marv met ne denn displegadenn ebet. Yann avat a ya e-barzh, a wel roudoù ar marv. Hag an avielour a lavar « Gwelet en deus ha kredet en deus. » Perak eo diouzhtu sklaer evitañ? Rak gouzout a reomp eo sant Yann diskibl ar garantez, an hini en deus bet ar garantez glañ, an hini tostañ ouzh Jezuz. Glander ha nerzh e garantez a ro dezhañ mont diouzhtu d'ar feiz en Adsavidigezh. « Gwelet en deus ha kredet en deus », n'eo ket hepken abalamour ma'z eo e garantez nebutoc'h merket gant ar pec'hed, met ivez rak ar garantez en deus ouzh Jezuz hag ar garantez en darvoud an Adsavidigezh zo un hevelep tra, hag enni en deus kemeret perzh en un doare peurvadus.

Breudeur ha c'hoarezed, ma c'heller lavarout kalz a draoù diwar-benn an Adsavidigezh hag he disoc'hoù en hor buhez e-giz tud vadezet, e c'hellomp lavarout hiziv-mañ: ar vadeziant a ro deomp

karantez hollc'halloudek Jezuz en deus trec'het ar marv, a sikouro ac'hanomp da garout ar re all, hor bed, evel Doue. Ar vadeziant a ro deomp ur galloud dreistnaturel a garantez.

Sellomp bremañ ouzh un tu all eus Adsavidigezh Jezuz: digoriñ d'ur vuhez nevez a ra . An Adsavidigezh n'eo ket un distro d'ar vuhez a-raok, met digeriñ a ra dorioù d'un amzer nevez. Bez e c'hell bezañ gwelet en Aviel hiziv: « D'ar c'hentañ devezh eus ar sizhun, Mari-Madalen a ya d'ar bez da c'houloudeiz; bez e oa c'hoazh deñvalijenn. » Sant Yann ne lavar ket « warc'hoazh ar sabad », met « d'ar c'hentañ devezh eus ar sizhun ». An Adsavidigezh a zo bremañ deroù un amzer nevez. Ar vuhez nevez-se a laka ac'hanomp da vont e-barzh un amzer nevez. Ouzhpenn-se, Sant Yann en ur mod resis a lavar e teu Mari-Madalen da c'houloudeiz: deroù an devezh eo, ha gouloù an heol a gresko. Sant Paol a lavar en unan eus e ganaouennoù eo Krist ganet da gentañ eus an holl grouadurioù: komz a ra eus an Adsavidigezh mes en ur lavarout deomp eo Jezuz ur grouadur nevez.

An nevezenti-se a vez diskouezet gant ar mein font hag a oa e stumm eizhkognek. Perak eizh kostez? Rak e ya pelloc'h eget ar sifr 7, a dalvez ar peurvat. Anaout a reomp 7 devezh ar sizhun, 7 pec'hed kapital, 7 sakramant. Ar mein font gant 8 kostez a ziskouez neuze un dra nevez: an 8vet kostez, deroù buhez nevez an Adsavet. An nevezenti-se ne sell ket ouzhimp hepken goude hor marv. Bez' ez eo dija oberiant en hor buhez bemdeziek. Doue hepken a c'hell lakaat ac'hanomp da vezañ tud renevezed . Sant Paol a lavar ivez: « Naetaait hoc'h-unan diouzh an hen zroukfermant, hag e vezoc'h, c'hwi un toaz nevez, c'hwi hag a zo bara Pask, hep goell. » Deomp bezañ neuze tud nevez, hep pec'hed.

Met lâret a ra ivez eo liammet an nevezenti-se ouzh an ezvezañs goell ha goell kozh. Ar bara hep goell a veze debret e-pad ar Pask yuzev a oa bara na oa ket savet. Diouzh un tu, an dra-se a oa evit derc'hel soñj eus an hast o doa ranket an Hebreed kuitaat an Ejipt evit treuziñ ar Mor Ruz : ret e oa dezho kemer bara n'o doa ket bet amzer da sevel. Hag en tu all, ar goell a zo liammet er sevenadur yuzev ouzh ar pec'hed. Evit ar sabad e rank ar Yuzevien skarzhañ an holl roudoù goell pe goell eus o zi. Hervez sant Paol e teuomp da vezañ boudoù nevez peogwir hon eus skarzhet ar goell ac'hanomp hon-unan, da lavaret eo holl roudoù ar pec'hed. Met gallout a rit goulenn, an nevezenti roet deomp da c'houel Adsavidigezh Jezuz, zoken ma vo bleuniet goude hor marv hag a zo dija o labourat en hor buhez pemdeziek, a zo enebet ouzh ar pezh a anver an 'unan kozh', ouzh kement tra n'eo ket glanaet ennomp, ouzh hon natur denel, ouzh hor pec'hed pemdeziek.

Al Lazhiad Pask (la Séquence de Pâques) hon eus klevet kanet a-raok a laka da soñjal en emgann speredel-mañ : 'Ar marv hag ar vuhez a stourmas en un emgann burzhudus. Mestr ar vuhez a varvas ; o vevañ, e ren.' An emgann-se, a grogas e-pad temptadurioù Jezuz en dezerzh, a zo diskoulmet gant adsavidigezh Jezuz. Doue a c'hounez diouzhtu e Jezuz. Met gouzout a reomp e kendalc'h an emgann-se e pep hini ac'hanomp, e-lec'h ma stourm ar sklêrijenn hag an deñvalijenn, ar mad hag an droug.

Breudeur ha c'hoarezed, na zigaloniomp ket er stourmoù-se a sko ac'hanomp ken don a-wechoù. Na zigaloniomp ket er stourmoù-se a dreuz hor c'hevredigezhioù, ma weler sevenadur ar marv ha sevenadur ar vuhez o stourm, ma weler hiziv zoken sevenadur ar marv o vont war-raok hag o tapout tachenn dre lezennoù hag a ro ar gwir da lazhañ. Trec'het en deus ar C'hrist ar marv ha sevenadurioù ar marv. Lakaet en deus ar vuhez da drec'hiñ.

D'an deiz santel-mañ eus Pask, digemeromp en hor c'halonoù buhez nevez an Hini Adsavet da Veo ; digemeromp trec'h an Hini Adsavet da Veo war an droug hag ar marv ; digemeromp ar peoc'h a ro deomp Jezuz , a zo ezhomme hon c'halonoù hag hon c'hevredigezhioù. Ur Pask benniget ha santel deoc'h ! Amen!

+

## Solennité de Pâques

« Il vit et Il crut. »

Chers Frères et Sœurs,

Chère Anouck et vous, les membres de sa famille,

La fête de la Résurrection de Jésus que nous commémorons aujourd'hui et que nous allons fêter pendant les huit jours qui viennent nous conduit à réfléchir en premier lieu sur l'évènement même de la Résurrection. En quoi consiste la Résurrection ? Étymologiquement le mot signifie se relever. La Résurrection est-elle un retour à la vie d'avant ? Non ! Car Jésus Ressuscité aura d'autres propriétés que celles qu'Il avait lorsqu'Il partageait notre simple humanité. La Résurrection est-elle un évènement physique ? Oui pour une part. Est-elle un évènement spirituel ? Oui pour une autre part. Est-elle un évènement historique ? oui au sens où elle s'est déroulée dans l'histoire et a laissé des traces dans l'histoire. Les textes que nous entendrons tout au long de ce temps pascal nous montrent la voie d'accès à la Résurrection qui est la foi. La Résurrection ne se démontre pas. Elle n'est pas de l'ordre d'une vérité scientifique mais d'une vérité de foi à accueillir dans la foi et qui donne consistance à notre foi.

Ce matin, Frères et Sœurs, je voudrais regarder l'évènement de la Résurrection avec vous comme étant un acte d'amour et un acte auquel on accède par l'amour. La Résurrection est un acte d'amour de Dieu par rapport à nous, parce que l'amour de Dieu étant tellement fort, puissant et parfait, qu'il ne peut rester prisonnier d'un tombeau et qu'il triomphe du mal et de la mort. La Résurrection de Jésus est donc la manifestation de l'amour tout puissant de Dieu qui terrasse le mal et le pire des maux : la mort. C'est cette puissance d'amour qui nous est transmise à travers le sacrement du baptême qui naît de la Résurrection-même de Jésus. Voilà pourquoi le temps privilégié pour baptiser est le temps de pascal, le temps de la vie nouvelle donnée par Jésus. Nous sommes heureux en ce jour où nous fêtons la Résurrection de Jésus de faire rentrer dans sa vie la petite Anouck qui reçoit au plus profond de son être cette puissance d'amour de Dieu qui a déjà triomphé de la mort et qui la conduira à être victorieuse de la mort.

S'il est vrai que la Résurrection de Jésus est un acte d'amour de Dieu pour Jésus et pour nous, elle est également une réalité à laquelle on accède par l'amour. Et c'est ici que le témoignage de Saint-Jean est le plus éloquent. Saint-Jean arrive le premier au tombeau. Certes, il est plus jeune que Pierre et on comprend facilement qu'il court plus vite. Mais il y a aussi une signification symbolique. L'évangile nous dit que Saint-Jean accède le premier au mystère pascal de Jésus. Arrivé le premier au tombeau, il laisse entrer Pierre en premier. Pierre voit les marques du deuil mais n'en tire aucune conclusion. Jean, lui, entre, et voit les traces de la mort et l'évangéliste nous dit : « Il vit et il crut. » Pourquoi est-ce immédiat chez Saint-Jean ? Parce que nous savons que Saint-Jean est le disciple de l'amour, celui dont l'amour a été le plus pur, celui qui a été le plus proche de Jésus. La pureté et la force de son Amour le font accéder immédiatement à la foi en la Résurrection. « Il vit et Il crut », pas seulement parce que son amour est moins marqué par le péché et donc moins entravé, mais surtout parce que l'amour qu'il porte à Jésus et l'amour contenu dans l'évènement de la Résurrection sont une seule et même réalité à laquelle Saint-Jean a participé de manière plus parfaite.

Frères et sœurs, si l'on peut dire beaucoup de choses sur la Résurrection et ses conséquences dans notre vie de baptisés, nous pouvons dire ceci ce matin : le baptême qui nous donne l'amour tout

puissant de Jésus qui a triomphé de la mort nous aidera à aimer les autres, notre monde, comme Dieu. Le baptême nous donne une puissance surnaturelle d'amour.

Je voudrais regarder maintenant un autre aspect de la Résurrection de Jésus qui est que la Résurrection introduit et fait accéder à une nouveauté. La Résurrection n'est pas un retour à la vie d'avant mais elle est l'entrée dans une vie nouvelle et l'inauguration d'une vie nouvelle. Cette nouveauté nous est signifiée dans l'Évangile de ce jour : « Le premier jour de la semaine, Marie Madeleine se rend au tombeau de grand matin ; c'était encore les ténèbres. » St Jean ne dit pas : « Le lendemain du Sabbat », mais « Le premier jour de la semaine. » La Résurrection correspond désormais au premier jour de la semaine. Elle est le point de départ d'une nouvelle temporalité. La vie nouvelle inaugurée par la Résurrection fait entrer dans une temporalité nouvelle. De plus, Saint-Jean précise que Marie-Madeleine se rend au tombeau de grand matin. Nous sommes donc en début de la journée ; le soleil et la lumière ne vont faire que grandir. St Paul dira dans une de ses hymnes que le Christ est le premier-né de toute créature. Il évoque alors la Résurrection mais en nous disant que Jésus est une créature nouvelle parce qu'il est le premier à être entré dans cet état de la Résurrection.

Cette nouveauté marquée par la Résurrection est signifiée à travers les baptistères qui, à l'origine, sont octogonaux. Pourquoi ont-ils 8 côtés ? Parce qu'ils vont au-delà du chiffre 7 qui signifie la plénitude. Nous connaissons les 7 jours de la semaine, les 7 péchés capitaux, les 7 sacrements. Construire un baptistère avec 8 côtés revient donc à montrer que le baptême inaugure quelque chose de nouveau, d'où le 8<sup>ème</sup> côté pour marquer le début d'un nouveau cycle qui est la vie nouvelle du Ressuscité.

La nouveauté issue de la Résurrection de Jésus ne nous concerne pas qu'une fois que nous serons morts et que nous entrerons dans l'éternité. Elle est déjà agissante dans notre vie en chaque instant. Non seulement Dieu renouvelle tout notre être, mais Lui seul a la capacité de faire de nous des êtres nouveaux. Lui seul a la capacité de renouveler nos relations les uns avec les autres.

Saint-Paul évoque cette réalité également dans la deuxième lecture : « Purifiez-vous donc des vieux ferments et vous serez une pâte nouvelle, vous qui êtes le pain de Pâques, celui qui n'a pas fermenté. » Saint-Paul dit que nous devenons des créatures nouvelles. Mais il dit aussi que cette nouveauté est liée à l'absence de vieux ferments et de levain. Le pain azyme, pris dans le repas pascal juif, était un pain qui n'avait pas levé. D'une part pour faire mémoire de la hâte avec laquelle les Hébreux avaient dû quitter l'Égypte pour traverser la Mer Rouge : ils avaient dû emporter du pain qui n'a pas eu le temps de lever. Et d'autre part, le levain est assimilé dans la culture juive au péché. Pour le sabbat, les juifs doivent expulser toute trace de levain ou de ferment de leur maison. Selon Saint-Paul, nous devenons des êtres nouveaux parce que nous avons expulsé de nous le levain, c'est-à-dire toute trace de péché.

Mais me direz-vous, la nouveauté qui nous est donnée en la fête de la Résurrection de Jésus, même si elle s'épanouira après notre mort et qu'elle est déjà agissante dans notre vie de tous les jours, se trouve combattue par ce que nous appelons le 'vieil homme', par tout ce qui n'est pas purifié en nous, par notre nature humaine, par notre péché quotidien.

La séquence que nous avons entendue chantée tout à l'heure évoque ce combat spirituel : « La mort et la vie s'affrontèrent en un duel prodigieux. Le maître de la vie mourut ; vivant, il règne. » Ce combat qui avait commencé lors des tentations de Jésus au désert se trouve résolu avec la résurrection de Jésus. Dieu l'a définitivement gagné en Jésus. Mais ce combat, nous le savons, continue en chacun de nos cœurs où la lumière et les ténèbres, le bien et le mal s'affrontent.

Frères et sœurs, ne désespérons pas de ces combats qui parfois nous travaillent de manière très profonde. Ne désespérons pas des combats qui traversent nos sociétés où nous voyons la culture de mort et la culture de vie s'affronter, où nous voyons même aujourd'hui la culture de mort avancer et gagner du

terrain à travers des législations qui légitiment le droit de tuer. Le Christ a vaincu la mort et les cultures de mort. Il a fait triompher la Vie.

En ce saint jour de Pâques, accueillons la vie nouvelle du Ressuscité en nos cœurs; accueillons la victoire du Ressuscité sur le mal et sur la mort ; accueillons la paix que nous donne Jésus Ressuscité dont notre cœur, nos sociétés ont besoin. Belles et saintes fêtes de Pâques à vous ! Amen !